

AN DIBAB

Da gentañ, eus ar voudenenn,
Ar sistr gwellañ deu 'r-maez.
War c'horre sav ar c'hoaven
War ur bodezad laezh.
Hor faltazioù koantañ.
Eus grignol hon eñvor,
A dap ar peurliesañ,
Da gentañ toull an nor.

1962

ERC'H MEZHEVEN

Gant aezennig flour Mezheven
Brañsellat 'ra an halegenn
He bisigoù o tishilhañ
A c'hournij en avel skañv.
Floupadigoù gwenn a zispeg
Eus o zoupennoù dumek

Ha nij-dinij, ar malzennoù
O korolliñ skañv en Oabl
Zo ken espar hag hunvreoù,
Pe Erc'h-hañv deut d'ober goap.

Ar bisigoù 'ra d'an douar
Ur vantellig dum klouar,
En-dro d'an haleg 'korn ar c'hloz.

14 a viz Gouere 1963

HERE

Ha petra 'soñjez, bran du
Uhelwintet er saprenn
Ha petra 'soñjez, bran du
Emaout o spiañ ar glen
Daoust ha te 'wel tu pe du
Nevez hadet un dachenn ?
Ha petra 'soñjez, bran du
War skourr hebleg ar saprenn ?

Kerzu 1963

ARNEV

Div goumoulenn o pourmen,
Fall o imor, teñval o fenn,
Tommet mat dezho diouzh feson,
Rak un nebeud a-dreuz e kerzhont,
Ha daoust m'eo ledan an hent
Emaint aet da 'n em dourtal.
A-walc'h keta, 'vit kounnariñ
Ha lakaat an traoù da dreñ fall.
... Oi ! setu trouz o sevel,
Malañ groz 'reont a lajadoù,
Teurel outo tan ha luc'hed,
Erfin, 'n em gannañ ken a foeltr,
Ma tever an dour outo a dakadennoù.
A dakadennoù ? A-ruilh, a-builh, a-struilh !
Ret eo lazhañ tan ar gounnar...
Torret ivez sec'hed an Douar !

Mezheven 1964

STULTENNOÙ

Da vare an Nedeleg
E oa du o blev.
O blev hir gwagennek :
An div wezenn vezv.

Da veurlarjez druz
'Oant klañv gant ar ruzell.
Hogozik deut ruz
O blevad kazugel.

Da Bask 'oa yac'h an div goantenn
Ha gant an Ebrel yaouank
O doa sodet o fenn,
Ken 'voe deut dezho c'hoant
Da gaout blev melen !...

Sevenet o sorc'henn,
Bremañ an div c'hoar
'Deus blev liv d'al loar.

Ha nec'het an Ebrel
Gant an div dimezell
Mistr ha koant o div,
Gant blev memes liv...

An div veleganez,
Evel div Rouanez,
A dron war ar run.

Ha Mae pa zihun
Eo trellet e spered.
Dirak ur seurt kened,

E galon o tridal
 Ken ez a meyv-dall...
 Ha da'm div goantennig,
 Mae a gas e floc'hig,
 Gant profoù meurbet kaer :
 Satin-seiz arc'hantet,
 Voulouz erminiget,
 Gouelioù skañv glas-gwer.
 Strobinellet ar Priñsezed !
 Kinklet evel Rouanezed,
 Pe Voudiged ar C'hoad-glas :
 Prest eo Mae d'ober e choaz...
 Rak an div dimezell,
 Hedro 'vel an avel,
 Priñsezed o blev aour,
 'Zilez hep keuz o c'haredig,
 'Vit an Aotrou Mae pinvidik.
 ... Ebrel 'oa re baour !
 E-doug an hañv, pet ha pet stultenn
 O devo c'hoazh an div goantenn ?
 Pa zistano sev ar bezy,
 Bemdez e kemmo liv o blev :
 Aour-gwer, aour-melen, aour-gell...
 Ha pa strewo gant an avel,
 O gouelioù d'ar mizioù du,
 O blevad 'vo adarre du.
 Tremenet amzer o c'hoantiz.
 Ha tremenet o yaouankiz.
 Ur mintin 'tihunint o-div,
 O-div o krenañ gant ar riv,
 Ha reut ha pounner o blev,
 Gwennet gant un nozvezhiad rev...

AN DIV ZERVENN GOZH

Gweet hag adweet o skourroù
Hañval ouzh kozhidi seizet o izili
Gant ar remm. Kramennet ha roufennet
O dremm. Tarvoal o fennoù
Kozh int. Kozh-Noe
Nouspet gwech o deus bet kant vloaz
Nouspet gwiskad gwignenn a wisk
O c'halon derv.

Istor ur bloaz gwriziet war bep gwiskad
Istor rummadoù ha rummadoù
A vugale, a yaouankiz, a gozhidi
Rak buhez ha birvilh a zo bet en o brizh-heol.

O-unan emaint-i bremañ – Vandaled
O deus roet lamm d'o c'hoarezed
Ha goullonderet eo ar c'hontre...

Gwech un Tremener – pa 'z eus anezhañ
Un Arzour pe ur Barzh – a ra un arsav,
O c'hevarc'h gant doujañs
Souezhet gant Meurded o c'hened
Hag hiraezh o digenvez...

Gwengolo 1967

E-TAL AN TAN

Mouskan ar flamm aour-roz
o sevel a-gammigell
er siminal kloz.
Tarzhadennoù munut ar skilhoù
o strinkañ ulmennoù steredheñvel.
Chouchenn o paterat
damserr e lagadoù sinaat.
Trouzigoù pemdeziek er-maez,
fourradoù-avel er gwez
o c'hoari distagañ an deil diwezhañ
a yud ur Walkirienn ouez,
e pupli uhel Prad-ar-Feunteun.
Trouz un tren pounner o voudal er pellder
ha tostik-tost garm ur gaouenn.

SAV HEOL

Ur skleurig ruzart 'us d'ar Run :
Priñs ar Beure zo dihun
Sioul ha goustad e tistign
E ridozioù voulouz ametist.
Spurmantiñ 'ran e lagad lugern
E prenestr e gambr roz-brug.
O saludiñ an Deiz.

21 Genver 1965

BLOAVEZH MAT

Ur bloavezh nevez : un heuliad devezhioù.

Ra vo an Nevezamzer evidoc'h ur bromesa
Ra vo an Hañv evidoc'h un trec'h,
An Diskaramzer un douster
Hag ar Goañv ur peoc'h.

Ur bloavezh nevez : devezhioù ha devezhioù da zont.

Ra vo ho fazioù evidoc'h ur gentel
Ra vo skañv ho trubuilhoù
Ar Spi hag ar Fiziañs d'ho harpo
Ar Garantez d'hoc'h entano
Ar Spered d'ho sklêrijenno
Ha ra vo gras Doue ho pae.

Ur bloavezh nevez : devezhioù disheñvel.

Ra vo ar chañs war hoc'h hent,
Ra vo ar berzh war ho roud
Ra c'hoarzho ouzhoc'h pep beure
Ra dommo d'ho kalon pep kreisteiz
Ra vo evidoc'h pep noz un diskuizh.